

AR GOULMIG DILEZET

M. M. $\text{♩} = 100$.



En oabl glas an heol a lin-tre, la la (teir gwech)
En tour ar c'hleier a gane.

A gane, gant al lapoused,
Eun devez a evurusted;

Eureud diou galonig denec,
Diou rozen a nevez-amzer;

Diou rozennig karget a c'hli-
E-kreiz gened o yaouankiz.

Ha koz ha yaouank a gane
Dudi ar priefjou nevez...

Eur plac'hig naontek vloa hepke
A huanade gant anker;

Dirak ken dous evurusted,
He bec'h a oa pounner meurberd

Hag e sonje 'n he dehou kaer,
Karget a hunvreou tener...

An den-ze nevez-eureujet,
Ganti pell-ze a oa karet.

D'ez i hen a westlas ive,
Hep distro, kalon ha-buhe.

Digoumoul e oa o dehou
Ha d'breder o c'halonou.

Siouaz, joa ar bad zo henvel
Ouz eur vogeden en avel.

Ar boan a drubuilhas timad
An diou galon drant eur pennad.
Eur gwall deudad, 'vel eur c'hleze
A droc'has liamma o c'harante.

Digar, an estig a dec'has;
Kalon ar goulmig a frañhas.

An estig ne distroas ket,
Eun durzunel en doa kavet.

Enn durzunel 'touz ar brankou
Skoulmet a oa ar c'halonou.

Hag ar plac'hig a hirvoude,
Hag e daerou stank a ruihe.

« Bue glac'harus ha c'honero,
Douzat e kavfen ar maro!... »

Klemmou ar goulmig glac'haret
Gant Doue a oe chilaouet.

Eur miz goude, ar c'hloc'h klemmus
En tour a zone truezus.

Kanvou eur vleuennig yaouank,
'Rok ar c'houlz sec'het war he brank.

Maro gant nec'h ha gant glac'har,
Koulmig dilezet gant he far!

FILOMENA CADORET (Koulmig Arvor),